



FOLLENN ENSKRIVAÑ 2019-2020 KENTELIOÙ-NOZ

Kinnig a ra Kerlenn Sten Kidna kentelioù evit razh an dud, ag an deraouidi betek ar re en o aez get ar yezh. Bep sizhun e vez ur gentel un euriad hanter **adalek ar sizhun 38 a viz Gwengolo 2019 betek fin miz Even 2020** (kentel ebet e-pad ar vakañsoù-skol). En tu arall d'ar c'hentelioù-noz e aliomp an dud da heuliiñ an daou sadorniad staj a vo kinniget ar blez-mañ (an deizioù vo resisaet) get Kerlenn Sten Kidna, ur staj-hañv e-mesk ar re aozet get ar frammoù ezel a DAO ha, diwezhañ tra, labourat d'ar bihanañ un euriad er gêr etre pep kentel evit gellet monet a-raok (moaien zo deoc'h bout sikouret dre internet).

Frammet e vez ar c'hentelioù hervez ar pemp barregezh displeget e portfolio Europa ar yezhoù. A-raok lakaat hoc'h anv emañ ret deoc'h neuze gouiet ho live. **Mard eo bet tapet ar live A1 geneoc'h àrlane, da skouer, e c'hellit lakaat hoc'h anv er live A2.**

Kinnig a raomp **6 live** :

A1 (deraouidi)

A2 (goude ur blezad skol-noz)

B1 (goude 3 pe 4 blezad pe get ul live uhel tapet en ur mod arall)

B2 (goude 5 blezad skol noz)

C1 / C2.

Gellout a rit lenn danvez pep kentel en hor lec'hienn internet www.ksk.bzh e-barzh ar rubrikenn «Deskiñ» ha «Portfolio ar brezhoneg DAO». Evit gouiet ho live, div feson : er priziñ hoc'h-unan a-drugarez d'an danevelloù-blez get DAO pe monet e darempred geneomp.

DIRET

Skozellit ar gevredigezh é roiñ argant !



Kerlenn Sten Kidna a zo ur gevredigezh a dalvoudegezh hollek ha gellet a ra neuze degemer argant hag a c'hell bout didennet ag an tailhoù. Ma roit argant d'ar gevredigezh e c'hellehet, doc'h ar lezenn, digreskiñ ho tailhoù a 66 % ag ar sammad, betek 20 % ag ho kounidoù tailhadus. Ur skrid-degemer a vo roet d'an donezoner.

Skouer : ma roit 50 € e c'hellehet didenniñ 33 € ag ho tailhoù ha ne gousto deoc'h neuze nemet 17 €.



AN D'ASSON

**Kazetenn
divyezhek
Bro an Alre**



CHOM BEV

**Ul levrig
tañva**

**(get ur
bladenn)**



DAET EO GENIN

Un DVD

**evit mont a-raok get
ar yezh ha gwellaat ar
c'hompren dre selaou**

Evit gouiet hiroc'h ha monet e darempred geneomp : skol-noz@ksk.bzh / 02.97.29.16.58



FICHENN EMEZELIÑ 2019-2020

Anv-familh : _____ **Anv-bihan :** _____
Chomlec'h : _____
Kod-post : _____ **Kumun :** _____
Pzg. : _/ _/ _/ _/ _/ _____ **Postel :** _____

Ma anv a lakaan d'ur gentel live : A1 A2 B1 B2 C1 C2

Lennit taolenn ar c'hentelioù ha skrivit e peseurt kentel e kemerehet perzh (deiz/eur/kumun):

Kumun : _____ Deiz : _____ Eur : _____

Emezeliñ (dre ret)	<input type="checkbox"/> Priz leun : 20 € <input type="checkbox"/> Priz «ezel engouestlet» 15 € (dibab a ran ar priz-mañ ha prest on da sikour ar gevredigezh get ma barrezhioù hag é reiñ un tamm amzer evit lakaat e plas hec'h obererezhioù e-pad ar blez) <input type="checkbox"/> Priz get un distaol : 15 € (evit ar studieren, an dud dilabour, an eil pe an trede den ag ur familh ma tiskouezit ur brouenn)
Kentelioù	<input type="checkbox"/> 125 €
Donezon	<input type="checkbox"/> Ar sammad : _____ €
An Dason	<input type="checkbox"/> 5 € da dapout àr ar lec'h <input type="checkbox"/> 8 € dre lizher
An DVD « Daet eo genin »	<input type="checkbox"/> 5 € da dapout àr ar lec'h <input type="checkbox"/> 8 € dre lizher
Al levrig « Chom bev »	<input type="checkbox"/> 5 € da dapout àr ar lec'h <input type="checkbox"/> 8 € dre lizher
Hollad paeet da KSK	_____ €

Kasit ho chekenn da *Kerlenn Sten Kidna, 6 rue Joseph Rollo, 56400 En Alre*

Bep blez e vez kinniget daou zevezh staj (daou sadorniad) get Kerlenn Sten Kidna. (20€ bep devezh :da baeiñ deiz ar staj). Kavut an deziadoù àr al lec'hienn ha lakait ho anv ur sizhuniad en a-raok.

Stajoù : Intereset on	<input type="checkbox"/> evit un devezh staj <input type="checkbox"/> evit daou zevezh staj
---------------------------------	--

Ouzhpenn ! Bout ezel a gKerlenn Sten Kidna a ro ar gwir da amprestiñ **e mediaoueg Brec'h** (levrioù ha CDioù e brezhoneg hag e galleg àr danvez Breizh). Moaien zo amprestiñ é tiskouez kartenn-ezel ar gevredigezh.

Gwirioù àr ar skeudennoù / Listenn skigniñ ar Gerlenn

- A-du on bout kelaouet diàr-benn titouroù Kerlenn Sten Kidna dre bostel
- A-du on bout àr ar skeudennoù (fotoioù, filmoù...) embannet pe lakaet en linenn get Kerlenn Sten Kidna.

D'an _/ _/ _____ E _____
Sinadur :